

# SON HELENA

*Ar Verc'h.*  
*Allegretto* ♩ = 104

*m.f.* Mamm, ma fell d'eoc'h va di-me-gi beuz  
ar bou-lan-ger n'gom-zit ket d'in.  
*p* Se - rak e-ta, He-le-na? Se rak e-  
*p.p. call* ta, va merc'h Se - rak e ta

## I

### AR VERC'H

Mamm, ma fell d'eoc'h va dimezi,  
's eur boulanjer, n' gomzit ket d'in.

### AR VAMM

Perak eta, Helena,  
Perak, eta, va merc'h, perak eta?

## II

### AR VERC'H

Eur boulanjer a fouet e doaz  
Hag a hell ober d'in ker gwaz!

### AR VAMM

Ya! re wir eo, Helena,  
Ya, re wir eo, va merc'h, ya! re wir eo!

## III

Mamm, ma fell d'eoc'h va dimezi  
Eus eur c'higer n' gomzit ket d'in. (1)

(1) Lakat komzou ar vamm ar « Perak, eta Helena » hag ar « Ya! re wir eo Helena », bep eil, warlerc'h koubladou ar verc'h evel m'int laket warlerc'h ar c'henta hag an eil koublad.

IV

Eur c'higer 'zo kriz a galon  
Am c'hemerfe e lec'h eul lon.

V

Mamm, ma fell d'eoc'h va dimezi,  
's eun tavarnour, n' gomzit ket d'in.

VI

Eun tavarnour a rafe d'in  
Chom, heb ehan, e stal ar gwin.

VII

Mamm ma fell d'eoc'h va dimezi,  
Eus eur c'harrer n' gomzit ket d'in.

VIII

Gand e vinviou, eur c'harrer  
A vouzarfe tud ar c'harter.

IX

Mamm, ma fell d'eoc'h va dimezi,  
's eur mansoner, n' gomzit ket d'in.

X

Eur mansoner, a gêr da gêr,  
Vez' foueta pri ouz ar voger.

XI

Mamm, ma fell d'eoc'h va dimezi,  
Eus eur c'halvez, n' gomzit ket d'in.

XII

Gand e vouc'hal vras ar c'halvez,  
Am faoutfe, penn-da-benn, ken aes.

XIII

Mamm, ma fell d'eoc'h va dimezi,  
's eul labourer n' gomzit ket d'in.

XIV

Bepred er park gant labourer  
'vit eur vaouez tenna micher.

XV

Mamm, ma fell d'eoc'h va dimezi,  
's eur c'hantonier n' gomzit ket d'in.